

KANNADIG

HA GOZH

Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 66 Mae - Mezheven 2010 Priz : 2 €

Bev mat eo gouenn ar Bismigerion

Sachet eo bet va evezh, nevez zo, gant pennadskrid « Paotr al leur gozh » - *Brezhoneg unvan skrivet, brezhoneg komzet : gallzhoneg* » war « Dazont Breizh/L’Avenir de la Bretagne », niv. 486, Genver-C’hwevrer 2010. Chomet on etre daou vennozh goude bezañ lennet anezhañ, betek dont d’en em c’houlenn ha mat em boa graet deskiñ brezhoneg, peogwir em bije, hervez “Paotr-al-leur-gozh”, roet dorn, evel nevezvrezhoneger¹, da grouiñ ar gallzhoneg-se, gant va fouez-mouezh eus Breizh-Uhel, ha ne oa ket hini ar galleg avat, a zlean resizañ, hogen kentoc’h hini un troc’her-buzhug, boas da huchal war e sterniad oc’hen oc’h havregal e miz Gwengolo. E keñver ereadurezh, ereadurezh va galloweg-me o vezañ disheñvel a-walc’h diouzh hini ar galleg, se a vire ouzhin, d’am soñj, d’he dreveziñ droch.

Diwar ar bomm-lavar : “*Ar vamm-gozh ne gompren ket he mab-bihan, hag ar mab-bihan “diwanek”, ne gompren ket e vamm-gozh*”, em eus prederiet un tammig ha graet ouzhin va-unan an evezhiadenn-mañ : mab-gozh, mab-bihan, bez’ e vank amañ ur mell er chadenn diegezhel : hini ar vamm. Perak ne vez ket graet dave outi ? Hag ar respont a zo : dre ma ne oar ket ar vamm-se brezhoneg, war-bouez un nebeut gerioù eeun evel : “Kenavo”, “Yec’hed mat”, “Mat an traou”, “Bloavezh mat”, “Nedeleg laouen”... Perak n’he deus ket desket brezhoneg ? dre leziregezh ? dre ma ne felle ket dezhi ? Nann, dre ma ne felle ket d’ar vamm-gozh e komzfe he merc’h brezhoneg

an hini eo. Alies e vez klevet an dra-se, ha n’eus ket miz ’zo em eus gwiriektaet c’hoazh ar fed-se gant div vaouez em eus bet tro da zivizout ganto. Hag an abeg roet ganto evit digareziñ o mamm a oa : ne felle ket dezho e c’houzañve o merc’hed pezh o devoa-int gouzañvet o komz brezhoneg war porzh ar skol c’hall pe er c’hlas zoken. N’eo ket souezhus neuze e vefe diaesterioù a veizerezh etre ar mab-bihan hag e vamm-gozh. Bez’ e soñj bepred houmañ ez eo didalvez deskiñ brezhoneg, yezh an tremened eviti, hag he devoa graet an dibab gwellañ p’he deus miret ouzh he merc’h a gomz brezhoneg, hag he rediañ da zeskiñ galleg, yezh an dazont hag an araokaat, yezh al labour ivez². Diaes eo dezhi, bremañ ma wel he mab-bihan o vrezhonegañ, anzav he deus pleget hep stourm dirak ar Skol C’hall, mennet da lazhañ hor yezh. Lavarout hiziv ez eo diveizadus brezhoneg he mab-bihan, a zo, diouzh perzh ar vamm-gozh, ur seurt digarez pe un doare emzifenn, da reizhabegañ he dibaboù kent, o lezel da gompren e vez meizet ar galleg gant an holl dud, pa vez gant ar brezhoneg ur bern rannyezhoù disheñvel a vir ouzh an dud en em gompren etrezo, ha

¹ Nevezvrezhoneger abaoe 46 vloaz memestra.

² N’eus ket ur miz e lavare din Paol Kalvez : “Na pet gwezh em eus klevet va zud, ganet e dibenn an 19-vet kantved, hag ivez va zud kozh, o lavarout “brezhoneg a-walc’h a ouezo atav ar bugel-se, ne vo ket gwerzhet ; galleg eo a rank deskiñ evit gounit e vara”. Soñjomp ivez er pezh a lavare Krouer Brittany Ferries “Trugarekaat a ran va zud dre ma n’o deus ket desket (o) brezhoneg din”. Ar wirionez a oa ganto er stad m’edo ar yezh e skoaz hini ar sevenadurezh e 1950 ; e 1850 e vije bet tu evel e Flandrez, hag e broioù kreiz Europa na oant ket e dalc’h un impalaerouriezh kreizennet evel hini Pariz”.

brezhoneg peurunvan he mab-bihan a zo ur rannyezh ouzhpenn etre ar rannyezhoù all.

Bez' e vefe ar brezhoneg arnevez, anvet "gallzhoneg" gant Paotr-al-leur-gozh, ur yezh plaen evel ar galleg, heñvel he fouez-mouezh hag hec'h ereadurezh ouzh hini ar galleg. Lakaomp ! Hogen, ar bobl eo, e keñver ereadurezh da skouer, he deus tamm-ha-tamm pleget da c'hiz ar C'hallaoued o sevel ar frazennoù a lakae ar rener da gentañ³ : "Me a gan", "me a ev gwin", "me 'oar brezhoneg" evel e galleg. Evit pezh a sell ouzh steuziadur ar pouezh-mouezh, ez eo se un abadenn all, un anadenn hollek eo, ha gant ar galleg da gentañ, nemet en Elzas-Mozell marteze, pe Okitania. Ar skinwel gall e pep ti hag ar vugale o vont d'ar skol adalek o daou pe dri bloaz, betek pemp bloaz warn ugent pe muioc'h c'hoazh evit darn anezho, a zo pennabeg d'an dra-se. Dister e teu da vezañ levezon ar metou tiegezhel, pezh na c'hoarveze ket pa veze diskroget gant ar skol da bevarzek vloaz, ha ma kendalc'he ar vugale da labourat war atant o zud pe tost ouzh o metou parrezel orin. A-hend-all, emañ un darn vat eus ar pouezh-mouezh e distagadur gerioù zo, hag er c'heñver-se e c'heller stadañ he deus ar bobl heuliet tamm-ha-tamm distagadur ar galleg ha dre-se graet d'ar pouezh-mouezh steuziañ. Soñjal a ran da skouer en diftongenn "ao" a gaver e-barzh gerioù evel "aod", "kaol", "paotr", "paot". Er bloavezhioù c'hwegont pa gemeren perzh e "*Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion*", e veze kelennet deomp, gant kelennerion evel Yann Kerlann da skouer – Doue d'e bardono – da zistagañ "awd", "kawl", "pawtr", "pawt", hag em eus c'hoazh war va eñvor ar bomm-lavar : "*Deomp d'an awd bremañ*", pa ne oa ket pell ar mor ha maz aemp da gouronkañ diouzh an endervezh, evel e Lokronan-Leon e 1964. Un darn eus ar Brezhadezed yaouank a gemere perzh, bet ganet e rannvro Paris, o devoa poan o tistagañ an "aw"-se hag a hañvale dezho bezañ un distagadur kouerion, pe, gwashoc'h, distagadur an alamaneg. Evidon-me, diaester ebet peogwir e oa paot an "awed"-se em yezh-vamm-me, ar galloweg : "kopyaw", "nouyaw", "rouchyaw", "kënyaw". Distagañ "kopyô", "nouyô",

³ Komzoù Paol Kalvez adarre : Pa grogis da gelenn war-lerc'h ar breur Visant Seite e KEAV e raen gant e levr "*Me a zesk brezoneg*" ; ur skoliadez a gavas ken aes an displegadur verb dibersonel "*conjugaison impersonnelle*" ma ned eas ket pelloc'h a-hed he buhez : me, te, eñ hi ni c'hwi, int a skriv, a skrive a skrivas a skrivo...

"rouchyô", "kënyô"⁴ a vije bet kavet lu⁵ gant an dud, ha sellet evel distagadur un tourist parizian o klask komz galloweg. E brezhoneg ne hañval ket bezañ lu distagañ an "aw"-se evel ar galleg "au" peogwir e vez aliet, gant "Geriadur Brezhoneg" an Here, da zistagañ evit ar gerioù usveneget : *ôd, kôl, pôtr, pôt*. En ur zistagañ "ô" (distagadur pobl sañset) e-lec'h "aw" (distagadur broadelourion ar bloavezhioù c'hwegont) ez eo diaes na zegemer eo bet divlazet pouezh-mouezh ar brezhoneg. Bez' ez eus betek an diftongenn "aou" a vez distaget "ô" da skouer gant ar ger "faou". War ur bladenn embannet gant Loeiz Ropars hag Al Leur Nevez er bloavezhioù eikont, "*Rimodell ha kanaouenn*", e vez kanet ar rimodell anavezet mat "*E koad Ker-Yann*" ma vez anv enni eus "*delioù faou bet toullet gant ar glav*". A-gevret gant Loeiz Ropars e kan ur vaouez kozh, hag e klevet mat-tre houmañ o tistagañ "*delioù vô*" e-lec'h "*delioù faou*", un tammig evel ma vez distaget "*Peñfô*" gant ar c'hallegerion en anv va farrez c'henidik, "*Gwenvenez-Penfaw*", pa vez distaget difazi "*Peñfaw*" gant gallowegerion ar c'hornad.

Daoust ha ne vefe ket orin divlazadur ar brezhoneg-pobl, evit ar skouerioù am eus meneget, da gavout e komzoù gary, evit chom hep lavarout kunujennus, bet distaget gant Jakobined zo er *Convention*. Da skouer, d'an 8 pluviôse, bloaz II ar Republik C'hall, e tisklerie Barère, unan eus an unnek a gemere perzh er "*Comité de Salut Public*" : *Il vaut mieux instruire que faire traduire, comme si c'était à nous à maintenir ces jargons barbares et ces idiomes grossiers qui ne peuvent plus servir que le fanatisme et les contre-révolutionnaires* ».

An dud o ren e parrezioù Breizh-Izel, daou gantved zo, hag a chome dreist-holl er bourc'hioù : maered, bourc'hizion, marc'hadourion, kenwerzhourion... ur wech deuet ar c'homzoù-se betek o divskouarn, gant an urzh groñs da zigeriñ ur skol c'hallek e pep parrez, a oa startaet en o diarvar e vefe trec'h un deiz ar galleg. Koulskoude ne c'hellent ket dioueriñ ar

⁴ Kënyaw (bugale vihan), hevelep orin gant ar ger brezhonek "kenou" hag an hini kembraek "cenu" (re vihan un aneval) a zo dres, er stumm-se "kënyô", tremenet e galleg Bro-Anjev, hag am eus gwelet skrivet "quegnot", nemet e vefe ur ger a oa er galianeg, peogwir ez eo "quenal" er prezeg normanek.

⁵ N'eo ket gwir penn-da-benn an dra-se, pa glaske tud zo – ar merc'hed dreist-holl -, distagañ "jôné" ar ger "jawnây" (ajonc), pe "garsô" ar ger "garsaw" (silioù kof melen), pe c'hoazh "mitô" ar ger "mitaw" (un doare soubenn, met ivez anv ar vro : ar Vro-Mitaw), evit kuñvaat o galloweg.

brezhoneg en o darempredoù gant ar gouerion, met klask kompezañ garvder ar yezh, e c'hellent ober an dra-se en ur zrevezañ distagadur ar galleg evit an "awed" usveneg, met ivez evit gerioù evel "deiz", "feiz" deuet da vezañ "de", "fe", pe gerioù all evel "karantez", "digarez", "trugarez", betek stumm-boaz ar verb "bezañ" "vez", o koll o "z" en distagadur evel pa vije bet gerioù gallek. Tamm-ha-tamm, o klevout an distagadur-se digant ar pennoù-bras o dije tud ar bobl heuliet o skouer.

Un tammig faltaziek e kav deoc'h eo va foellataerezh marteze ? N'eo ket ken faltaziek-se ma keñverier gant pezh a zo c'hoarvezet gant ar galloweg ; lavaromp kentoc'h amañ ar "mitaweg", rannyezh gallowek etre Liger ha Gwinun, an hini hepken a anavezan mat.

Ne fell ket din tabutal war ar fed ma vefe ar galloweg ur yezh wirion pe ur rannyezh eus ar galleg, fellout a ra din lavarout hepken ez eo ar galloweg hag ar brezhoneg daou brezeg o deus bet da c'houzañv digant ar Skol C'hall, hogen ar brezhoneg kalz muioc'h evel-just eget ar galloweg, rak ar pennadurezhioù a ouie mat-tre e oa ar galloweg ur prezeg tost a-walc'h ouzh ar galleg, neuze kalz aesoc'h da ziwriziennañ eget ar brezhoneg a oa ur yezh wirion, disheñvel mat. En enep, pezh a zo bet heñvel e stourm-se ar Skol c'hall a-enep an daou brezeg ez eo bet ar goaperezh ([...] *jargons barbares*, [...] *idiomes grossiers*...). N'eus netra par d'ar goaperezh evit ober d'an dud dazkemman o boazioù ha mont a steud gant ar re all, dreist-holl evit ur bobl vazhyevet.

Evel evit ar brezhoneg e ouie kenwerzhourion ar bourc'hioù, marc'hadourion loened, notered, mezeion..., mui pe vui ar mitaweg, ret dezho en o zreizvarc'hadoù gant ar gouerion, hogen techet e oant da guñvaat gerioù zo, a gavent re roc'hellek evit o c'horzailhennoù boaziet d'ar galleg flour. Ne lavaran ket gevier, test on bet eus an dra-se. Da skouer ar ger "râysyë" (endervezh) maz eus gantañ un alberz mat eus distagadur ha pouezh-mouezh ar mitaweg, a zo deuet da vezañ distaget "résyé", ken divlaz ha ma vefe galleg, ha d'ar re a ya da welout tud kozh evit dastum gerioù ar mitaweg, e vez touet dezho n'eo bet distaget biskoazh ar ger-se "râysyë", evel pa vije bet ur gunujenn en o genou. Peurvuiañ ez int maouezed,

⁶ Evit bezañ distaget reizh gant ur galleg e vefe ret e skrivañ « *raillesieulle* » hervez skrivadur kemplez ar galleg.

ar re-mañ o vezañ bet kizidikoc'h ouzh ar goaperezh eget ar wazed⁷.

Un tonkad heñvel, hogen brudetoc'h, ez eus bet gant ur ger all, "bègheñ"⁸ an hini eo, gant un eil stumm, "bèyeñ", hervez ar parrezioù. Ar ger brezhoneg "buzhugenn" eo. Tost ouzh "buyenn" e brezhoneg Bazh-Gwenrann eo ar stumm "bèyeñ", pa vefe kentoc'h ar stumm "bègheñ" nesoc'h ouzh ar stumm gwenedek "bugenn", distaget "bèghenn" mar ne fazian ket. O vezañ ma veze dastumet buzhug gant an holl re a yae da besketa, ha ma oa dreist-holl tud ar bourc'hioù a rae ar pesketaerezh-se dre linenn, ne oa ket er bourc'hioù e veze kavet kalz buzhug avat. Mont a raent da gavout kouerion a anavezent da zastum ar sapre buzhug en o farkeier, hogen evit ar gouerion ne oa ket ar preñved-se "ver de terre", ne anavezent nemet "bègheñ", ret mat neuze da baotred ar vourc'h implij ar ger-se. C'hwezh an teil a chome koulskoude gant ar ger, ret e oa dezho difankañ anezhañ, hag ez eo evel-se maz eo deuet "bègheñ" da vezañ "béguin", ger gallek dereatoc'h. Pa vez distaget ar ger "béguin" e galleg Bro-Naoned, dreist-holl e Norzh al Liger, e oar pep hini eus petra e vez anv. Un deiz pa oa c'hoazh hor mab er skol-vamm, e tistroas d'ar gêr en ur lavarout deomp o devoa kavet ur "béguin" war porzh ar skol. Ha me da c'houlenn outañ : "Piv eo an hini en deus lavaret deoc'h e oa ur "béguin" ? Hag eñv da respont : Ar vestrez-skol ! *Etrange retour en grâce*, diouzh perzh ur skolaerez ag ar skol c'hall, evit ur ger mitawek he dije forbannet didruez daou ugent vloaz zo.

Ne fell ket din lavarout kalz traoù ouzhpenn a-zivout an nevezc'herioù, ha n'eo ket tomm outo Paotr-al-leur-gozh, pep tra pe dost zo bet lavaret e niverenn diwezhañ Kannadig Imbourc'h, gant pennad Jil Ewan, em boa adkemeret em fennad. Adlavaromp hepken, war-lerc'h Youenn Olier ha

⁷ An dra-se a ra din soñjal en istor bet kontet gant va mamm-gaer deuet d'ober hec'h annez e Naoned gant he gwaz er bloavezhioù tregont. Kenderc'hel a rae da zougen he c'hoef eus Bro-Dardoup, hogen war ar pemdez ne lakae ket ar stroñsoù hag an distroñsoù. Un deiz, war ar marc'had, e klevas un Naonedadez o lavarout d'ur vaouez all edo ganti : "Regarde qu'elle allure elle a celle-là avec sa boîte de camembert sur la tête". Adalek an deiz-se e tilezas va mamm-gaer he c'hoef, en ur virout avat un droukrañs, a enep d'an Naonediz, ha ne oant ket gwir Vrezhoned eviti. Bez' ez eo an istor-se da vezañ lakaet agenstur gant hini ar vuslimadez-se o tougen ar vurka e Naoned, tapet en ur vleniañ he c'harr gwisket evel-se. Ganti ne vez ket a vezh, hejet e vez kentoc'h he gwiskamant evel ur banniel stourm.

⁸ Er ger « *bègheñ* » e verk ar skrivad « *gh* » staoniekadur ar « *g* », boutin kenañ e gwenedeg.

Jil Ewan, ez eo ar brezhoneg-pobl yezh ur bobl blouezat⁹ n'eus mui anezhañ koulz lavarout hiziv ; biken ken ne vo arveret kantadoù a c'herioù¹⁰ a zo e geriadurioù Vallée pe Roparz Hemon, dre ma ne kensellont nemet ouzh buhez ar maezioù. En enep e vank enno kantadoù a c'herioù evit ar

⁹ Ar bobl blouezat-se, isdiorreet e-pad pell, hervez dezverkoù an armerzhourion, he deus miret avat ouzh ar brezhoneg da steuziañ da vat ; mar bije bet diorreet kenañ Breizh-Izel, hag en un doare ingal e pep lec'h, e vije bet gallekaet penn-da-benn hag abaoe pell ; n'eus nemet sellout ouzh pezh a zo c'hoarvezet en takadoù en-dro d'ar c'hêrioù bras evel hini Brest, pe takadoù touristerezh an Arvor. Koulskoude, ar bobl-se, ken e oa unyezher, a ouie sevel gerioù nevez evit bastañ d'hec'h ezhommoù, hogen evito hepken, da skouer pa zegouezhas ar c'hentañ ardivinkoù-atant he deus gouezet ijinañ “dornerez”, “falc'herez”, “gwenterez”, “gwilcherez”... Evit ar peurrest, bez' e tlefe bezañ bet kefridi ar skol, hogen ne oa ket a skolioù brezhonek.

¹⁰ Evel ar verb « *havregal* » am eus arveret uheloc'h.

vuhez a-vremañ, kêrel, ardivinkel, kalvezoniel, skiantel, leun enni a vinviñ, a ardivinkoù hag a wikefreoù nevez, a c'houlenn ul lavar dibarek ha troioù-lavar azasaet. Ret mat neuze krouiñ gerioù nevez evit bastañ d'an ezhommoù-se. Da dud zo, ha na welont er brezhoneg nemet ur yezh a eil renk, rannvroel, folklorel zoken, n'eus nemet arverañ ar gerioù gallek, a vefe hervezo gerioù etrevroadel forzh penaos. Ya, a c'hellfe bezañ, hogen, arabat dezho goude-se klemm ez eus c'hwezh ha blaz ar galleg gant ar brezhoneg

Aes eo pismigañ, a vezer boas da lavarout, yac'hus eo zoken, a c'heller ouzhpennañ, gant ma vefe savidik¹¹ avat ar pismigerezh-se.

Yann MIKAEL

¹¹ Savidik : *constructif*

Adaoz an Emdennoù

Bep sizhun, evit chom hep lavarout bemdez, e vez komzet er meziennoù diwar-benn adaoz an emdennoù¹², diwar-benn kudenn an emdennoù. Evit kalz tud e teu dezho ar merzad ez eo diziskoulm ar gudenn-se. Hervez ar sontadegoù – war pezh am eus lennet - e vefe muianiver ar C'hwec'hkogniz a-enep d'an adaoz, hogen pa vez goulennet outo hag e kredont e vo graet, e respont ar muianiver “ya”, rak n'eus ket tu da ober a-hent-all. Diac'hinadek¹³ a-walc'h eo, met se a zispleg marteze an nebeut a fiziañs o deus an dud er bolitikerion o deus bleinet anezho el lagenn. Evidon-me e lavarfen a-walc'h ez eo ar gudenn-se un tammig heñvel ouzh ar boan dent.

D'an hini en deus aon rak an dentour, dre ma touj kaout muioc'h c'hoazh a boan gantañ eget pezh a c'houzañv endeo, e vez bepred un digarez mat evit chom hep mont d'e welout, seul vui ma vez distanet ar boan goude bezañ kemeret ur bizenn pe ziv a louzoù diboaniañ. Adc'hraet e vez meur a wech ar c'hoari-sigotañ-se gant hon den re gizidik, daoust da alioù fur an dud nes pe kar dezhañ, a lavar dezhañ ne c'hell ket bepred parañ an droug d'e zant gant louzoù diboaniañ hepken, seul vui ma tigresk galloud diboaniañ al louzoù a-feur ma kresk ar brein-krign en e zant, met, e-keit ha maz eo c'hoazh gouzañvadus e chom bouzar ouzh diwalloù ha kuzulioù. Hogen

¹² Emdenn : *retraite* ; emdennad : *retraité*.

¹³ Diac'hinadek : *paradoxal*.

un deiz, pezh a zlee c'hoarvezout a c'hoarvez, n'eo mui gouzañvadus, ret mat eo dezhañ mont da welout an dentour : ne ra mui netra al louzoù ha begozh ur gor a zo war wel. Siwazh, n'eo ket kalonekaus deznaou¹⁴ an dentour : “re ziwezhat eo, emezañ, brein-holl eo ho tant, ret eo tennañ kuit anezhañ. Setu bloaz pe bloaz hanter e vije bet ret deoc'h dont d'am gwelout”.

Skeudennet mat a-walc'h e vez kudenn an emdennoù gant gobidell an den re gizidik hag e zant breinet, ha retvezh un adaoz eus ar reizhiad-se a zeu seul welloc'h war hor spered. Kinniget ez eus bet meur a ziskoulm evit diluziañ ar gudenn : kizañ an oad da vont war e leve (an diloc'h da 60 vloaz, ken brudet, sellet outañ gant ar c'hweluniadoù evel ouzh ur gwir enkerzet¹⁵, na c'heller ket stekiñ outañ), kreskiñ skodennoù an danvez-emdennidi, kreskiñ niver ar bloavezhiadoù skodenniñ evit kaout ur c'hledemdenn¹⁶ feur leun (un distaol a vez graet evit pep bloavezhiad o vankout). An deiz all, edon o selaou ar c'heleier er skinwel, pa glevis kinnigerez ar c'heleier o tibunañ pegement a zregantad e tegasfe pep hini eus an diarbennoù-se evit digreskiñ divigad¹⁷ kefioù an emdenn. Klozañ a reas he displegadurioù en ur ziskleriañ :

¹⁴ Deznaou : *diagnostic*.

¹⁵ Gwir enkerzet : *droit acquis*.

¹⁶ Gledemdenn : *retraite qu'on touche, pension*.

¹⁷ Divigad : *deficit*.

mar bije bet lakaet en embreg an holl ziarbennoù-se ne vefe stanket c'hoazh nemet 50% eus an divigad. A-dra-sur, e komprenner aze ez eus ur gudenn a vo diaes da zirouestlañ, hag a gresko gant ar bloavezhioù : tro-dro da bevar skodenner evit un emdennad a oa er bloavezhioù c'hwegont, hiziv n'eus mui nemet 1,4 skodenner, hag a-benn ugent vloaz e vo hogos ur skodenner evit un emdennad.

Ret eo lakaat an dud pinvidik da baeañ a lavar renerion ar c'hweluniadoù hag ar bolitikerion ar muiañ a gleiz. A c'hellfe bezañ, nemet ne vo emberr tamm ebet ken a dud pinvidik, lakaet ma vint war ar raden evel ar re all gant an dreisttelloù, hag ar re pinvidik-dreist a ouezo tec'hout kuit evit chom hep bezañ touzet. Er mare-mañ e vez anv eus c'hoarierion skipailh Frañs aet da Su-Afrika evit klask gounit kib-bed ar melldroad. Lojet int bet evel roueed en un ostaleri pemp sterenn a goust 500 € pep nozvezh. Abeg a zo bet kavet en dispignoù lorc'hus-se gant Rama Yade, mavdierez c'hall ar Sportoù, a gave anezho andivezek¹⁸ er mareoù-mañ a zienez ; difennet eo bet an dispignoù-se gant Roselyne Bachelot, mavdierez ar Yec'hed, a ziogelas ne gousto gwenneg ebet d'ar gevrozourion¹⁹, hag hi da ziskleriañ e vefe paeet pep tra gant Kevread Gall ar Melldroad. Mat lakaomp ! Ha neuze me da soñjal : setu tud pinvidik-dreist o deus arc'hant leizh o godelloù, neuze e-lec'h forañ an arc'hant-se evit paeañ chomadennoù e-barzh palezioù, perak ne vefe ket kemeret evit stankañ kefioù an emdenn. Evit ober fent e oa evel-just, seul vui ma n'on ket sur e vefe a-du ganin ar milionoù a dud a vo peget ouzh skramm o skinweler e-pad ur miz evit arvestiñ ouzh ebatoù doueed nevez ar sirk, *panem et circensis* ar Romaned, neketa !

Er freuz-stal-se eus reizhiad an emdenn dre zaspazh ez eus un arvez ha n'eus ket bet kalz a gaoz diwar e benn, eus an divigad tudegezhel²⁰ e fell din komz. Mar ne c'hell bezañ stanket nemet 50% eus an divigad er c'hefioù gant an holl ziarbennoù kinniget, ez eo en abeg n'eus ket bet trawalc'h a vugale en tiegezhioù. Rummad ar re o devoa 20 vloaz e 1968 hag a zegouezh hiziv d'an emdenn, holl gant e c'hoant da voinat²¹ eus an hanvoud²² ha gant kletadurezh an araokaat, n'en

¹⁸ Andivezek : *immoral*.

¹⁹ Kevrozour : *contribuable*.

²⁰ Tudegezhel : *démographique*.

²¹ Moinat : *jour*

²² Hanvoud : *existence*.

deus ket bet kalz a vugale, n'eo ket bet graet gwelloc'h gant ar rummad da heul, na kennebeut gant ar re deuet war o lerc'h. Klevout a reer ar C'hallaoued o fougasiñ o deus ar feur-genel uhelañ en Europa, disoñjal a reont resizañ ez eo a-drugarez d'an enbroidi maghreat hag afrikat o deus int bugale e-leizh. Unan eus an diarbennoù bet ijinet gant ar bolitikerion da stankañ ar mankse a vugale, a zo bet an enbroerezh, lakaat da zont tud, eus Afrika dreist-holl, a c'hellfe perzhiañ da baeañ gledemenn hor poblañs divugel o koshaat. N'eo ket hepken n'en deus ket perzhiet kalz an enbroerezh-se da ziluziañ kudenn an emdennoù, pezh a oa da rakwelout rak dedennet e oa dreist-holl an dud-se gant an arc'hoproù tiegezhel a veze roet brokus dezho gant ar reizhiad sokial gall, hogen degaset en deus ouzhpenn kudennoù diziskoulm er bannlevioù treuzfurmet e keodedoù disgwirioù e-lec'h e ren an holl drafikoù : drammoù, armoù, tuerezh laeroñsioù a bep seurt... Ned eo mui bremañ un enbroerezh-labour hogen un enbroerezh a boblidigezh o tegas e relijion - an Islam -, e boazioù - burka, lieswregiezh -, e lezennoù - brezel etre bandennoù... Ne fell ket ken d'an darn vrasañ eus an enbroidi, ar re yaouank dreist-holl, enteuziñ er vroad c'hall ma tistaolont he zalvoudoù, met bevañ etrezo hervez o lezennoù. Setu ar Republik C'hall kemeret he favioù er griped a hollvedelezh he devoa stignet : ober ur Gall gant n'eus forzh piv dre ar bed, gant ma asantfe d'he zalvoudoù, d'he yezh ha d'he laikelezh.

N'eo ket kement-se an enbroidi a zo da damall er gobidell-mañ, hogen kentoc'h ar bolitikerion. Bez' o deus bet ar galloud en o daouarn hag e oant sañset bezañ tud gant trawalc'h a spered evit rakwelout disoc'hoù o divizadennoù, paneve dezho seveniñ ur raktres pouezusoc'h, mennet gant bedelourion ar Riezoù Unanet, peogwir ez eo bet hetet meur a wech gant an aozadur etrevroadel-se, ma tlefe Europa degemer muioc'h c'hoazh a enbroidi, war zigarez stankañ an tebet divigad tudegezhel bet broudet ganto a-hend-all. En degouezh-mañ e vefe gwashoc'h c'hoazh atebegezh²³ ar bolitikerion.

Etre ober bruderezh evit ar sioc'hanerezh diouzh un tu (220.000 sioc'hanadenn bep bloaz er C'hwec'hkogn) hag harpañ an enbroerezh afrikat pe maghreat diouzh an tu all, klaskit pezh a zo diac'hinadek amañ !

Donwal Gwenenez

²³ Atebegezh : *responsabilité*.

Ar pezh a chom eus ar Relijon

An emskiant e-pad marv ar c'horf a zo ur fed testeniet puilh ma 'z eus unan : ur c'horf peurzifiñv, didalm e galon, dioberiant e empenn, a c'hall peurzihuniñ a-greiz-holl, ha dezrevellañ resis ar pezh a oa c'hoarvezet p'edo semplet, neket hepken er sal e-lec'h m'edo, met ivez e tachadoù all an ti pe an ospital, traoù n'en defe ket gwelet pa vefe bet en e stad vev boutin. Ken alies ez eus bet c'hoarvezet hag adc'hoarvezet darvoudoù a-seurt-se, ken alies int bet testeniet gant aotrouniezhoù skiantel neptu, ken n'eus nemet ar re zic'houzvez penn-da-benn war an holl ditouroù-se a c'hall kenderc'hel da nac'hañ anezho. Padal, zoken ar re a anzav eo dinac'hadus ar fed-se n'o deus ket kalz a c'hoant da deurel pled ouzh an evezhiadenn a vez degaset gantañ dre ret : emskiant mab-den a ya pelloc'h eget ar c'horf, pelloc'h eget labour an empenn zoken. An enebiezh-se a ziskouez penaos Yann Arnevez (ur c'henderc'had eus sevenadurezh ar Sklerijennoù) a zo ken paket en e dammig korf, ken en em gav spontet ha feuket bewech ma vez roet da vennadiñ soñjal ez eo muioc'h eget ar c'horf-se. An aon-se n'eo ket ur mennozh pe ur soñj fraezh, anat ; un emdeogadenn, ur skoulm stardet war ar reizh, ne lavaran ket.

Dalc'het e vez an eneoù er stad-se gant gwask dizanv ha kreñv ar gevredigezh, a vir anezho en ur stad speredel korrganek dre c'hourdrouz ar goaperezh hag an distaolidigezh (hemañ ur gourdrouz faos, met n'eo ket dizefedusoc'h evit keloù-se). Lieskementet forzh pegement gant ar reizhiad deskadurel hag ar stlenn, ar pezh na oa er penn-kentañ nemet ur mennozh prederouriezhel pe vrizh-prederouriezhel, a zo troet d'un emzifenn diemouez a ra da bep hini herzel ouzh astenn e emskiant pelloc'h eget an nebeutañ-holl ret evit ar vuhez pemdeziek. E-giz-se e vez serret ar c'helc'h : nac'hañ a reer an emskiant nann-korfel daoust d'ar yoc'h ramzel a brouennoù, n'eo ket hepken peogwir ne greder ket ennañ, met ivez peogwir eo deut an dud da vezañ divarrek evit mat da verzañ an emskiant-se. Bevañ a reont dispartiet diouzh o emskiant donañ ha digemmañ, bac'het en ur c'helc'hiad boutinoù, renet gant gourzrec'h ar "sevenadur" hag ar "skiant" a ro un emdouell a binvidigezh hag a liested d'ar bobl.

Ar "bed gwirion" a gred d'an dud-se bevañ ennañ a zo hini an daouegezh galileoat-karteziat peurziskaret endeo gant fizikouriezh Einstein ha Planck. An daouegezh-se a gendalc'h avat da vezañ skignet evel gwirionezenn beursur gant ar skol hag ar stlenn : n'eus er bed netra estreget an "traoù fizikel" hag a-us dezho "soñjoù mab-den", ar "sevenadur". Diouzh un tu, gwirvoud kalet an danvez, renet gant lezennoù tebet digemm, ez eo diazezet warno aotrouniezh difaziadus ar "skiant" ; diouzh an tu all, toaz blot hag aes-da-verañ ar "mennozhioù", an holl anezho kevatal a-fed talvoudegezh. E rannved ar mennozhioù e kaver ar "gravez", da lavaret eo haol pep hini da grediñ e forzh petra, gant ma ne c'hourbanno ket ar forzh-petra-se evel ur fed pe ur wirionezenn hollvedel.

E seurt bed, n'eus netra luoc'h eget an obererezh kravezel. Hiziv an deiz, an dud relijiel koulz hag ar re zizoue a gred ez-devot e bezañs un danvez emrenet hervez lezennoù displeget gant ar skiant, lezennoù na vezont gwallet nemet ur wechig an amzer gant emellidigezh ar "burzhud", an darvoud "dizisplegatus", "doueel". Kaer o devez ar brederourion diskar keal an "Doue e doullou"-se (an hini na wered nemet dre doullañ faoutoù er ouiziegezh skiantel), n'eus nemetañ a chom war aoter ar feizidi. Ofisielaet gant ar renkad politikel, skolveurel ha stlennel, an disparti Kantadek strizh etre "feiz" ha "gouiziegezh" a zo troet da gomzoù aviel evit darn brasañ an eneoù tuet d'ar gravez, daoust d'an disparti-se bezañ disivoud fraezh diouzh ur sellboent katolik, peogwir e krou un islonk didreuzadus etre daou zomani m'eo diazezet ar meizad kristen war o c'henemglot. Serret ar c'helc'h, ur wech c'hoazh : an emskiant vac'hagnet hag ar gravez vac'hagnet a glok an eil egile.

Pa ran anv eus emskiant vac'hagnet, e c'hourbannan penaos meizad an emskiant evel un dra a zo lec'hiet er c'horf pe unan gantañ, a zo direizh, azvanel, klañvidik. Ar meizad-se a vac'h an emskiant e harzoù n'int naturel e mod ebet, ret nebeutoc'h c'hoazh. Holl hengounioù speredel ar bed, an holl reolvuhezioù sklerijennet a grog gant an evezhiadenn anat n'eo ket unan an emskiant gant ar c'hig, n'emañ ket an emskiant "e-barzh" an empenn, er c'hontrol eo labour an empenn a zo ebarzhet en ur mod en emskiant, evel an egor

ebarzhet lezennoù jedoniell er-maez anezhañ. Un dra eo kompren kement-se dre ar poell hepmuiken, un dra all kalz gwelloc'h eo henn amprouiñ end-eeun e fedoù fetis an emskiant nann-korfel e tud marv-war-a-seblant. Ur skwerenn nemetken a vefe a-walc'h a-benn ar fin evit diskar ar gredenn e vez "krouet" ar poell, ar soñj hag ar reiz gant an empenn, da lavaret eo gant ar c'hig. Miliadoù a skwerennoù ez eus avat, ha diwar stadañ ez int studiet kentoc'h gant tud dizoue, *New Age*-ourion pe boudaiz, kentoc'h eget gant katoliged, protestanted pe Yuzevion relijiel, e weler pegen boaziet eo ar feizidi-mañ a hiziv d'ur vezañs dister : an ene-a-us-d'ar-c'horf n'eo mui nemet un dra a zeuio da wir er bed all, dre vuzhud ar marv ; e-lec'h bezañ dija er bed-mañ ur gwirvoud solut, a genvez ganeomp en oberoù disterañ koulz hag er prantadoù kaerañ.

Padal, e-pad miliadoù a vloavezhioù, bewech ma tistage unan bennak ar ger "me" e rae anv ez-anat eus e ene divarvel, a c'halle pediñ ha bezañ atebek war e oberoù dirak aoter an doue. Ar

c'horf hag ar bred stag outañ n'oant nemet ul lodenn eus an ene-se, hag estren e oant ouzh an diamzer, diatebek e oant zoken a-fed pec'hed pe santelezh, ne c'hallent kaout nemet vertuzioù pe falldechoù diskleriet gant ar gevredigezh. Abaoe m'eo deuet ar c'hig hag e vred da vezañ emren, pep hinienn ne sell outañ e-unan nemet evel ezal ur spesad loened hag ur "c'heodedad", hep ar pezh a ro ster don d'an atebegezh, ezlec'hiet gant ar bondoug hepmuiken da glotañ gant ar gevredigezh, bondoug a c'hall bezañ kinklet gant "divez relijiel" pe get. Soñjit 'ta peseurt diforc'h e ra, da skouer, pa lennit ar Bibl : ma ne lennit ket anezhi gant hoc'h ene divarvel, gwelloc'h deoc'h tremen hep lenn ha mat pell 'zo, peogwir e lennit gant ar c'hig e-lec'h lenn gant ar spered.

Olavo de Carvalho

Lakaet e brezhoneg gant Ewan Delanoy, embannet evit ar wech kentañ e *Diário do Comércio*, dindan an titl *O que sobrou da religião*, niverenn ar 12 a viz Mae 2010.

Priz ur gantroidigezh

Emañ o paouez bezañ embannet gant « *L'Œuvre éditions* », levr Joseph Fadelle, « *Le Prix à payer*²⁴ ». Un Irakad eo Joseph Fadelle, hag ar priz-se ma komz diwar e benn a zo priz e gantroidigezh d'ar reiz kristen. Kontet e vez deomp gant al levr-mañ pezh a c'hoarvez d'ur muslimad pa fell dezhañ dont da vezañ kristen. Un diskennad eus ar "profed" eo Mohammed al-Sayyid al-Moussaoui, eus klann ar Voussaouied, ur familh vras a vrientinion chiat. Un den abouez-tre e oa e dad, gant atebegezhioù trevourel bras en e glann. Tonket e oa d'ar mab-se dont da vezañ warlerc'hiad e dad.

E 1987 eo deziadet e gantroidigezh. Edo oc'h ober e servij soudard e Bassora, p'en em gavas gant ur C'hristen en e gambr. Evitañ e oa ur vezhekadenn, "*Em bro, eme Jozef, e seller ar Gristenion evel tud eus ar renk izelañ, tud a netra, tud vreïn, eo arabat kaout tamm darempred ebet ganto*". Kaozeadennoù a voe memestra etrezañ ha Massoud, e gavandad kambr ; ur paotr hegarat e oa, "*C'hoant em eus bet, eme Jozef, d'e ganttreiñ d'an Islam ; krediñ a raen e vije bet aes, ne oa nemet displegañ dezhañ ez eo*

ar Bibl ul levr falset. Hogen n'eo ket bet fellet dezhañ mont gant ar vreuradenn-se. En enep en deus goulennet ouzhin lenn pizh ar C'horan, da gompren mat anezhañ.

Anavezout a rae ar C'horan evel-just, hogen bez' e lenne anezhañ evel kalz Muslimiz all, da lavarout eo e teske hag e tibune dre eñvor, hep kompren ; pep lennadenn o kontañ evel un oberenn vat evit ar varn diwezhañ. War alioù Massoud en deus kroget da adlenn ar C'horan, met en ur glask kompren pep frazenn, ha kavet en deus un toullad traoù digempoell e-barzh. Aet eo da welout un ayatollah, ur mignon d'e dad, evit ober atersadennoù dezhañ : "*Digempoelloc'h eget va atersoù e oa e respontoù, emezañ. D'ur mare, o vezañ ma ne zeue ket ken a-benn da respont d'am goulennoù en deus lavaret din : "Atersoù eeun e ra ouzhin an dud : ar pezh a zo pec'hed - haram -, ar pezh n'eo ket - halal -, en o buhez pemdeziek". Hag en deus goulennet ouzhin chom hep dont adarre d'e welout, iskis ha luziet e kave va atersoù*". En un nebeut mizioù e oa kouezhet e reiz en he foull, ne grede ken nag er C'horan nag er profed. Neuze en em droas etrezek Massoud evit goulenn outañ reiñ an Aviel dezhañ da lenn.

²⁴[1] *Le Prix à payer*, Joseph Fadelle, L'Œuvre éditions, 224 pajenn, 18 €.

Lennet an Aviel gantañ, e voe kendrec'het gant komzoù Jezuz. Kanttroet en e galon e teuas da skeiñ ouzh dorioù ilizoù Baghdad, o c'hortoz bezañ degemeret a-dro-vriad, gant jourdoul. Souezhet ha kerseet voe, serret e voe an nor ouzh e fri. Ne gompren ket an aon-se. Bremañ n'emañ ken en Irak e kompren o ersav, difennet eo ar striventuadelezh²⁵ : *“mar bije bet gouezet e oan bet degemeret gant ur C'hristen, eme Jozef, e vije bet ar marv evitañ hag evidon”*. Dre forzh kendalc'hegiñ e voe aotreet da vont d'an oferenn hag e-pad dek vloaz e teuas a-benn da guzhat e gantroidigezh d'e familh. Bemdeiz e stoue pemp gwech etrezek ar Mekka gant e dad hag e nav breur, hogen e-lec'h lavarout *Al-Fâtiha*, raklavar ar C'horan, e pede Jezuz. Ur wech dimezet e c'houlennas kaout un ti dezhañ er-maez ti boutin bras e dad, evit bezañ dieupoc'h, pezh n'o devoa ket graet e vreudeur dimezet. Deuet e oa a-benn da ganttreiñ e wreg, ha gant o mab e talc'hent da vont d'an oferenn bep Sul da Vaghdad. Siwazh ne c'helle ket padout ar saviad-se da virviken, hep lakaat da sevel, tamm-ha-tamm an diskred en e geñver, e spered e vreudeur hag e dad. Ur sulvezh ma tistroe diouzh an oferenn gant e wreg, e teuas ar vatezh war arbenn dezho, pennfollet an tamm anezhi : deuet e oa e vreudeur ha furchet o devoa penn da benn d'an ti. Youc'hadennou trec'h a oa bet ganto p'o devoa diguzhet ul levr difeiz, dic'hlan - e Vibl e oa. Tra grevusoc'h, aterset o devoa Azhar, o mab, a oa chomet en ti gant ar vatezh, ha p'o devoa goulennet outañ petra a rae gant e gerent paz aent d'ar Sul da Vaghdad en devoa graet sin ar groaz. Paket e oa ! Ne c'helle ket e dad, eñv ar penn klann, gouzañv ar vezh da gaout ur mab kristen, seul vui ma oa hemañ an hêrezhour, an hini dreistkaret, tonket dezhañ bezañ e warlerc'hiad. E vamm, hi ne laoskas nemet daou c'her : *Lazhit anezhañ !* Taolet e voe e-barzh koufr ur c'harr, e zaouarn ereet ouzh e gein, ha kaset dirak an ayatollah meur e Nadjaf. War c'houlenn e dad e sinas hemañ ur fatwa a lavare : *“Mar c'hoarvez deoc'h kaout ar brouenn ez eo deuet da vezañ kristen, e vo ret lazhañ anezhañ, ha gopret e vo gant Allah an hini a seveno ar fatwa-mañ”*.

Evit ober dezhañ plegañ e voe kraouiet e toullbac'h Hakimieh, e-lec'h e veze bac'het prizonidi bolitikel. E-pad tri miz e voe kannet ha boureviet evit ma anzavfe piv e oa ar re o devoa e skoazellet en e gantroidigezh. Grik ebet ne rannas ; ur soñjenn nemeti a rae dezhañ derc'hel :

^{25[2]} Striventuadelezh : *prosélytisme*.

bevañ betek e vadeziant. Tremen a raio c'hwezek miz er prizon. 240 lur-pouez a oa dioutañ pa oa aet en toull, 100 lur-pouez hepken pa oa deuet er-maez.

O vezañ m'edo atav o chom en Irak edo bepred e vuhez en arvar ; kuzuliet gant ur beleg e teuas a-benn da dec'hout gant e wreg hag e zaou vugel da Jordania e-lec'h e voe herberc'hiet en un tiegezh kristen. Eno eo e voe badezet dre guzh, war un dro gant e wreg hag e vugale, ha ma kemmas e anv, o tont da vezañ Youssef Fadel (Joseph Fadelle). Hogen steuziet ne oa ket an dañjer evit-se. Klask a veze bepred warnañ gant e vreudeur. Adkavet e voe ganto dre zegouezh, e kreiz kêr Amman, un deiz ma oa aet da brenañ ur profig evit e verc'hig da geñver Nedeleg o tont. Asantiñ a reas sevel en o c'harr evit breutaat da vat ganto, pevar eus e vreudeur hag e eontr Karim, breur yaouankañ e dad. A-benn ur c'hardeur e voe kuitaet kêr Amman hag en em gavjont en un draonienn digenvez. Chom a reas ar c'harr a-sav war ribl an hent, hag e-pad teir eurvezh e voe breutaet evit e gendrec'hiñ da zistreiñ da Vaghdad, davet e dad. Dirak e nac'hadenn dibleg e tennas e eontr Karim ur bistolenn hag e vukas anezhi warnañ. Sklaer e oa, edont o vont d'e lazhañ, rak, pistolennoù a oa ivez gant e vreudeur, hep mar ebet. Krediñ a reas dezhañ klevout ur vouezh o lavarout dezhañ en e benn : *“Tec'h ! Tec'h !”*. Bez' en em lakaas da redek, ar buanañ ma c'hellas ; kerkent e klevas ar boledoù o c'hwitellat ouzh e divskouarn ; tizhet e voe gant unan anezho en e c'har. Flakañ ha semplañ a reas. Pa zihunas edo ouzh dor un ospital, bet degaset gant karr unan bennak, tec'het kuit diouzhtu. Piv e oa ar Samariad mat-se en devoa e sammet war ribl an hent, biken n'hen gouezo. Steuziet e oa breudeur hag eontr, hogen bez' e c'hellfent dont en-dro, bremañ ma ouzont emañ o chom en Amman.

Kendaonet e oa adarre d'an harlu evit lakaat e diegezh er goudor. Dont a reas a-benn, gant kalz a ziaesterioù, da gaout un aotre da vont da Vro-C'hall. Dilestrañ a reas e Paris d'ar 15 a viz Eost 2001. Pezh a vez diskouezet deomp gant levr Joseph Fadelle n'eo ket islamouriezh, hogen gwirvoud pemdeziek an Islam²⁶ e broioù ar Reter-

²⁶ Bez' e c'heller menegiñ ivez *Laissées pour mortes*, levr Nadia Kaci, Rahmouna Salah ha Fatiha Maamoura, éditions Max Milo, ma vez kontet ennañ pezh a c'hoarvezas d'an 13 a viz Gouhere 2001, e-pad an noz e Hassi Messaoud, kêr an tireoul er Sahara. Etre 300 ha 500 den, gourvroudet gant imam El Haïcha, ur sikludkêr eus Hassi Messaoud, o deus kaset da benn ur c'hadergerzh-kastiz e-enep maouezed a

Nesañ. Kravez ar Vuslimiz n'eo ket ar relijion a beoc'h hag a garantez e fell dezho ha da dud 'zo -“*ar vajaneion eürus*”- diskouez deomp. Bez' ez eo ur relijion n'he deus al laikelezh ster ebet eviti,

laboure eno, oc'h ober labourioù-mog, o vevañ o-unan etrezo. Kantadoù anezho a voe kannet, boureviet ha gwallet, lezet war al lec'h evel marv. Er miz tremenet ez eus bet c'hoazh ur c'hadergerzh-kastiz heñvel war atiz an hevelep iman. Aozet eo bet ur vanifestadeg e Paris dirak kannadti Aldjeria evit enebañ, met ne oa ket kalz tud war pezh am eus lennet.

ur relijion a fell dezhi gourvodiñ²⁷ ouzh an holl he bongoalioù hag he boazioù, ha kefridi Joseph Fabelle eo dibikouzañ hon daoulagad, lavarout dañjer an Islam, evidomp-ni Europiz, ha da gentañ-penn d'ar C'hallaoued o deus digoret brokus o dor d'ur morad a enbroidi vuslimat, o vegozhiñ bremañ dont da vezañ ur gwir marc'h Troia.

Tiernvael

²⁷ Gourvodiñ : *imposer*

Ar Vuhez ez on-me

Ar re skourret ouzh an Doue bev, ar re-se n'anavezint ket ar marv.

Ret eo da Vab an den bezañ uhelsavet “evit ma tizhfe, drezañ, ar re a gred ennañ, ar vuhez peurbadel” (Yn 3). Ya, Eñv an hini eo hag a dremen dioutañ ennomp-ni e c'halloud a vuhez peurbadel. En Aviel Yann, Jezuz a zo anv gantañ 18 gwech eus buhez trafadel²⁸ ha komz a ra en amzer-vremañ. “Ar vuhez peurbadel **en deus** an hini a gred”. (Yn 3-36)

Buhez trafadel ha buhez douevel an hevelep tra eo. A Jezuz em eus ar vuhez-se. Eñv eo a vuhezeka va buhez-me, rak lavaret en deus : “Me zo ar vuhez”. Evit gwir e verzomp e ra alies-tre gant ar ger elfennel-se, hogen penndalc'hel, hag e ra gantañ ur ger-heol.

Bara ar vuhez, Stivell ar vuhez, Sklerijenn ar vuhez o sankañ enno bannoù skedus. Hag e welomp o kinnig an “dour-bev”-se d'ar Samariadez en ur zisplegañ dezhi ez eo ur road douevel. Bez' ez eo enta ur vuhez uheloc'h hag a drebarzh an den. Ha meizañ a reomp ervat n'eus ket anv amañ eus buhez vihan kig ha gwad an tudennoù, merion dister war an douar-mañ.

Ur veur hag estlammus a vuhez eo, e gwirionez, a zo bet roet, ken e ranker komz eus doueeladur, eus doueekadur. Rak se eo a-walc'h, hiraezh emouez pe diemouez an den. Anzavet eo gant Sant Bazilioz Aleksandria : “Brasañ c'hoant an den, emezañ, eo dont da vezañ Doue, hag a-benn-se e fell da Zoue chom den da virviken”. Evit gwir, pal an emzenadur a zo doueelaat an den. Doue en deus en em c'hraet den evit ober ac'hanomp un doue. Ha Sant Atanazioz Aleksandria a zo gantañ an dro-lavar-mañ :

²⁸ Trafadel : peurbadel, er ster : pezh a azonus eus Doue en un doare spesadeg.

“Doue en deus en em c'hraet kreud-douger (*sarcophore*) a-benn ma vefe an den awen-douger (*pneumaphore*)”.

Ya, krouet eo bet an den evit mont dreistañ e-unan, met neket gant ster Nietzsche, prederour alaman ar genelwerinelouriezh, ijiner an dreistden. Evel-just, morse ne zeu an den da vezañ Doue, gellout a ra bezañ doueekaet avat, rak diskleriet eo bet gant an Aotrou, e stag ar vuhez trafadel, en izelved-mañ, evit ar re a gred ennañ. Siwazh, an dud n'o devez ket c'hoant kompren, rak ur bern c'hoantoùigoù all a zedenn anezho.

Hogen fellout a ra da Jezuz hon treuzneuziañ en ur boud heñvel outañ, en un hinienn kedpar outañ, en ur ziskuliañ dimp an Drielezh, ouzh hor c'hevrediañ gant an Tri, o tont da vezañ **Doueed dre berzhiañ**. An draig bennak-se a Zoue, an nebeudig a dra-se eus an Tri, an dakenn-se a anien douevel hag a ra din kemer perzh er vuhez drinel a zo anvet **Rad-santelaat ha salvus**.

Gant kerrinoù²⁹ an Iliz eo e strink hag e tiorren ar vuhez douevel-se. Dreist-holl dre ar vadeziant hag ar Gevradiezh hag a zo he magadurezh. Neuze ez omp gwazhiet gant ur gwad douevel, skourret war ur red-tredan douevel. Ya, road ur vuhez dreist a zo bet graet deomp gant ar vadeziant, hogen ret eo derc'hel e ratre ar vuhez-se, hag a zo perzhiadur e buhez Jezuz, ha chomadur ennañ.

Oc'h en em harpañ war lizhiri Sant Paol, hon eus da gomz, da zerc'hel start, da drevelliñ, d'en em laouenaat, d'en em c'hloarekaat, da vezañ kreñv, da garout ennañ. “**En Aotrou**”, an dro-lavar-mañ a gaver 164 gwech e lizhiri an abostol. P'emañ galloudegezhioù an ene (kounerezh, meizerezh,

²⁹ Kerrinoù : *sacraments*.

mennantez) a-unvan-krenn gant an Tad, ar Mab hag ar Spered glan, neuze emañ an **doueveladur**. N'eo ket evel an doneg nevez gwisket ganti ar mab foran. N'eo ket ar sae-eured kouvidi ar banvez roueel. Bez' ez eo, ez argelek^{30f}, evel ur vazh houarn soubet e tan ar c'hovel, hag a chom houarn, daoust dezhi bezañ kemeret perzhioù an Tan. Komz a ra Soljenitsyn eus "ar c'henstok gant dorn tomm Doue". Tu a vefe da lavarout : "gant dorn loskus an Doue Bev". Ouzhpennomp e vir, ez adkempenn, ez uhela, buhez douevel Mab-den hag her gra deneloc'h, seul vui ma kemer perzh en Doueelezh. Muioc'h kigel paz eo

^{30f} Ez argelek : *symboliquement*.

awenet, en dije lavaret Péguy. Ha Yann-Baol II e Denver, e 1993, en deus embannet ne c'hell ar vuhez speredel en em zispakañ nemet pa vez diazezet war ur stuzegezh doujet strizh enni ar vuhez anienek³¹.

Kenoberiañ a ra Mari e ganedigezh hag e diorroadur ar Vuhez Douevel en ene ar re dasprenet (Paol VI 1968). Rak ar "gwellañ lodenn" eus an doueeladur er C'hrist a zo bet sevenet, klok, enni. He levenez-hi eo gwelout buhez ar C'hrist o redek ennomp.

Ar Bigouter

³¹ anienek : *naturel*.

Levrburutellerezh

Traité de prononciation breton du Nord Ouest gant Mikael Madeg³²

Da gentañ ez on en em c'houlennet perak 'ta e oa bet skrivet an oberenn-se e galleg. Padal eo anat ar respont : evit ma vezo gwerzhet ha lennet aesoc'h. Iskis eo memestra pa 'z eo bet skrivet al levr evit brezhonegerion desket, da gelenn dezho distagañ reizh ! Ma ! Fur e oa. Ezhomm a oa eus al levr-se ouzhpenn-se, evel ma verk Mikael Madeg, dre ma n'eus lec'h ebet ken e Breizh e-lec'h e vije chomet yac'h a-walc'h ar yezh e doare ma c'hellfed deskiñ distagañ mat anezhi en ur vevañ e-touez an dud.

Sur a-walc'h, pa oa bet graet emglev ar skritur e 1941, ne oa ket bet muzuliet pegen a-bouez ez eo ar pouez-mouezh, pe an taol-mouezh kentoc'h, evit ar brezhoneg, e-tal ur yezh evel ar galleg, a zo ken bras e levezon. Ne venegin ket kalz a dra war lodenn « skiantel » al levr. Fur em eus kavet an evezhiadennoù hag an alioù a zo skrivet. Ar pezh a zo eo n'on ket kendrec'het war an dalvoudegezh a ro M. Madeg d'an distagadur.

Aze emañ. Petra eo ha pelec'h emañ « ijin ar yezh » ? En distagadur ? Er gerioù ? Er yezhadur ? En troioù-lavar ? En holl war-un-dro ? E hini ebet anezho ? Pep tra a dremen, zoken un doare da zistagañ. Hemañ a c'hell kemm en un doare natur (a vefe gwelloc'h) pe dinatur, evel ar c'hreoleg a gomzer en Haïti... Pezh a gont, moarvat, ma faziomp, ez eo faziñ holl a gevret, a-unan.

³² E ti an aozer, Kêredol, 29800 Sant Tonan, 17 € franko, 148 p. Embannet gant « Emgleo Breiz ».

Tamall a ra M. Madeg da vedig-bed ar brezhoneg chaokat ur seurt kreoleg eta : brezhoneg a fed yezhadur ha geriaoueg, ha gallek an doare da zistagañ, re alies... Setu aze eta ul levr da zeskiñ distagañ ervat brezhoneg, ha war-un-dro ur flemmskrid, gouez d'an aozer e-unan. Iskis al levr a vesk skiant ha flemmerez ! War ar poent-se, pep hini a dap e begement. Diwan, meur a dro, ar skolaerion, ar gelennerion, ar skingomzoù, Youenn Olier ivez, Doue d'e bardono, pajenn 107 : « *Ur skrivagner, emezañ, eus ar re gentañ eus paotred ar 'Roazhoneg'* ». Daoust hag-eñ e vefe Mikael Madeg ur c'hlemmicher, ur spered trenk a zen ? Gwelloc'h e vije bet dezhañ chom war an dachenn skiantel. Pleget en deus d'an debbron a bege ennañ, klask lakaat ar bec'h war dud 'zo, c'hoari e brokolor.

Krediñ a ra da vMikael Madeg ez eo Youenn Olier hag e geneiled eus skritur emglev 1941 penn-kaoz eus taol mouezh fall-du skolaerezed Diwan Landerne. Na mui, na maes. Etre al linennoù e komprener ez eo fall an doare-skrivañ³³, penn-kaoz d'an holl zrougoù³⁴ eta. Ret eo gouzout ez eo Youenn Olier an hini eo, just-a-walc'h, a nac'has a-grenn dilezel emglev 1941, kement-se e 1945, pa ne oa nemet daou warn ugent ha den ebet evit e selaou, nemet un nebeudig, ar re o doa dibabet, d'e heul³⁵, ar peurunvan da skritur evit ar brezhoneg. Paneveto

³³ Ar pennad 30 pajenn 123 a zo he zalbenn « Récapitulatif des principaux problèmes de prononciation dus à l'orthographe « peurunvan ».

³⁴ Embannet eo al levr gant « Emgleo Breiz ». Margodennet eo M. Madeg gant an ti-embann-se, enebour touet emglev 1941 hag a zalc'h da skritur ar chaloni Falc'hun 1954.

ne vije mui a vrezhoneg hiziv an deiz, pe neuze e vije hepken ur parlant dinoaz : e doare ebet ur yezh par d'ar galleg. Eno emañ gwir bec'hed Youenn Olier, da heul Roparz Hemon.

Evit gwir e kav din kentoc'h ez eo dreist-holl levezon ar galleg e-unan an hini eo a zo pennkaoz d'ar pouez-mouezh fall, beuzet maz omp ennañ dibaouez. Ret e vefe studiañ penaos emañ kont gant ar c'hembraeg er c'heñver-se. Kavout a ra din ivez e vo kavet an tu da wellaat ar c'helenn war ar poent-se en ur ober hor mad eus ar c'halvezerezhioù arnevez. Dija e kav din ez eo gwelloc'h ar pouez-mouezh en deiz a hiziv e

³⁵ Niverennoù kentañ Al Liamm n'int ket skridaozet hervez emglev 1941. Youenn Olier an hini eo a zivizas ken abred ha 1945 chom hep dilezel ar skritur unvan, a-benn derc'hel bev ar spered broadelour a oa stag ouzh luskad Skol Walarn.

metou an Emsav eget na oa lakaomp tregont vloaz 'zo.

Pa seblant brezhoneg hor bugale bezañ ur seurt kreoleg, galleg troet hepken a-wechoù zoken, ez eo a-bouez bras e chomfe dilhad ar brezhoneg war ar c'hreoleg-se. Ha derc'hel da vont, gwellañ ma c'hellomp. Gwellaat pa gavomp an dro. Arabat digalonekaat hor bugale – nag ar re vras – gant ar gudenn-se. Mar fell dimp sevel ur gevredigezh nevez e Breizh, a-drugarez ha gant ar brezhoneg, n'eo ket ken grevus a-se e trofe ar brezhoneg d'ur seurt kreoleg, rak ar pal n'eo ket ar yezh hec'h-unan met ar gevredigezh a fell dimp sevel drezi. Unan kristenoc'h eget ar gevredigezh c'hall. A-hent-all, ne dalv ket ar boan.

Tepod Gwilhmod

Keleier mesk divesk

Notennoù

“Al Laz Kanañ”, ur strollad kristen a vrezhonegerion bet er skolioù “Diwan”, ar pep brasañ anezho, a zo o paouez embann e eil pladenn “Frouezh Nevez”: evit prenañ anezhi kasit ur chekenn 14 euro war anv “Allah's Kanañ” da M. Kloareg, 9 straed Armagnak 35000 Roazhon.

E meur a lec'h ez aio da ganañ er mizioù da zont :

- e Ploveilh d'ar Sadorn 19 a viz Mezheven da 20 e 30
- e Landerne, e kenstrivadeg al lazoù-kanañ, e-pad Gouelioù Kan al Loar d'ar Merc'her 14 a viz Gouhere ;
- d'ar Sul 18 a viz Gouhere e Gouel Arre Voce, er Releg e Plouneour-Menez ;
- d'ar Sadorn 4 a viz Gwengolo, 20 e 30 e Chapel Kerdevot an Erge Vras ;
- d'ar Sul 5 a viz Gwengolo, 16 eur e Lambader Plouvorn.

Oferennoù brezhonek

Mat eo degas da soñj pelec'h ez eus tu (c'hoazh !) da gaout oferennoù brezhonek : evit kaout muioc'h a ditouroù eo mat dont e darempred hervez an toleadoù :

- evit bro Dreger : ilizkatolik@voilà.fr ;
- evit penn-ar-bed :
- <http://minihi.levenez.free.fr/>
- evit Bro-Wened :
- breton@sainteanne-sanctuaire.com

Oferennoù lidet ingal

- e Landerne, bep trede sul ar mizioù ampar da 10 e 30 (iliz sant Tomaz)
- e Trelevenez, bep Sadorn (da 18 eur etre an Hollsent ha Pask; da 19 eur adalek ar Yaou Gambr-lid ha derc'hent an Hollsent; Beilhadek Pask a vez lidet da 21 e 30 ar sadorn). Evit Nedeleg ha Pask e vez war-dro 21 eur 30 en iliz ; lidoù da 18 eur da Yaou Gambr-lid ha Gwener ar Groaz.)
- e Lannuon bep Sadorn diwezhañ ar miz da 6 eur noz e chapel Sant Pêr ar Rusked
- er Folgoad e miz Mae : "ar Pemp Sul" : Sulioù miz Mae ha Yaou Bask, da 10 eur.
- er Vourc'h-Wenn da Lun ar Pantekost : Pardon sant Urfol ;
- e Landouzen An Drenek : da 11 eur da sul kentañ miz Gouhere ; pred ha c'hoarioù da heul
- 26 a viz Gouhere, Gouel Santez Anna : da 9 eur e kloastr ar Penniliz Keranna-Wened, Oferenn Santez Anna patronez Breizh.
- e Logildud Sizun : da 10e 30 prosesion 11 eur Oferenn da Sul diwezhañ miz Gouhere.
- e Bodiliz : 11 eur Gouel Maria Hanter-Eost.
- e Rumengol : da 18 eur derc'hent sul an Dreinded ha derc'hent ar 15 a viz Eost ;
- e Lokmaze An Drenek : da 11 eur ar Sul war-lerc'h an Hanter-Eost. Pred ha c'hoarioù da heul (rugby strobet, dominoioù) ;
- e Penniliz Gwengamp Pardon Sant Loup ar Sul war-lerc'h an Hanter-Eost : 10 eur.- er Folgoad : derc'hent eil Sul miz Gwengolo da 18 eur. Da 16 eur e loc'h ur birc'hirinadenn aozet gant Emglev An Tiegezhioù 7

km diouzh chapel Landouzen an Dreneg evit en em gavout da 18 eur er Folgoad.

- e kantoniou Kastell Paol ha Landivizio e vez un oferenn ur wech ar miz, tu pe du er c'hanton.

Ar bloaz-mañ, da skouer e vo lidet :

- Pardon Gwiklan, d'ar Sul 27 a viz Mezheven, da 10e30

- Pardon Sant-Servez, d'ar Sul 11 a viz Gouhere, da 10e30

- Pardon Lok Ildud, Sizun, d'ar Sul 25 a viz Gouhere, da 10e30.

Ar Voraerion

Buhez ar voraerion a zo trist er bed-mañ,
bepred pell diouzh o zud, edan glav hag arnev.
evit gounid bara, bara d'o bugale.
Ret eo dezho lemel ag o bro ha bale.

Kenavo a laront ha setu int er vag ;
n'eo ket an eur 'vito d'o d(ev)out ur galon gwak,
lakaat a reont da ouel, lavagnon pe kalm-chok :
a-raok bremañ, ma bag, a-raok, penn e kornog !

Ar vaouez paour 'ar an aod, hep skuizhañ, en he sav,
ouzh ar vag o pellaat a sell, a sell atav ;
he c'halon 'zo mouget en ur mor a c'hlac'har
hag 'ar he bougennoù redek a ra un dar.

An avel a c'hwitell e fardaj ar gwerni ;
ar mestr a lar : "Paotred, liv arnev 'zo 'arn(ez)hi ;
henozh e savo bec'h ; 'n em lakaomp prest enta".
Hag holl ar voraerion a bed santez Anna.

Bremañ 'ar ar mor bras emaint en o-unan,
ne weler a bep tu 'met ar mor hag an nean (neñv) ;
startoc'h-start er gouelioù avel ar maez a c'hwez,

an houlennoù a goeñv hag an noz du a gouezh.

Ha pa deu da gemer ar c'hard da hanternoz,
'vit maz ay ar re all un tammig da renoz,
ar moraer, o soñjal en e vro ken bourrus,
a gan en noz, goustad, ur werzenn hirvoudus :

Teir lev er-maez taolet, teir lev, diouzh an Douar bras,
ma enezenn a sav, du e kreiz ar mor glas ;
ar c'herreg astennet tro-ha-tro he goarn kloz
diouzh an houlennoù gouez hag a ruilh deiz ha noz.

E-mesk holl ar broioù en em strew dre ar Bed,
naren, n'en deus nikun hag a zo ken karet,
o ma broig a C'hroe, ha p'emaon pell diouzh out
klañv on, ha ma c'halon hep ehan a hirvoud.

O ma enez kollet du-se e kreiz ar mor,
pegoulz e touarin-me en da berzhier digor ?
Peur e anavin tan ha deurioù ma bro,
ken splann e du an noz ? Pegoulz e teuin en-dro ?..."

Hag huñvreal a ra ar paour kaezh martelod,
d'e vaouez en deus laosket o ouelañ 'ar an aod,
d'e vugale vihan, levez e galon,
d'e di livet e gwenn a gousk er stankenn don...

Ar vag, hi, a ya 'tav dindan daoulagad Doui,
'tro d'ar gouelioù tolpet, an Aeled he c'hondui ;
santez Anna, gwir vamm, a zousa an avel,
ha mont a reont 'vel-se, hep aon en noz teñvel...

Labourerion ar mor, micherourion kalet,
pe kalon a zo deoc'h, ha penaos e c'hellit
chomel 'vel-se bemdez en anken, er marv memb ?...
"Ne 'gred e Doue Hon Tad, hag Eñ a ro nerzh d'emp"

Yann-Bêr Kalloc'h 1905

Mererezh

13 € eo ar skodenn emezellañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* (16€ er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://pagesperso-orange.fr/kannadig/> (Notit eo bet kemmet chomlec'h lec'hienn EAT-IMBOURC'H)

Skridaozerezh

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr , pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moulet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù**. Kergreven - 29800 Trelevenez - ISSN : 1144 357X